

ME OC'HADOR, O SACRAMANT SANTEL!
GANT UR GALON EUN HAC FIDEL.



HON DELIVRAT, O VA ZALVER JESUS!
DENEUS AN TEMPEST QEN KUZUS.

AN¹ TEMPEST.

Douz oll-galloudus, Mestr an elemantchou,
Cetu ni ta birio preiz eus an tourmantchou !
A boan eus pêvar blosa, dre ur vocen eüzes,
E voamp oll reduiset da ur stat horrerus,
Ma velomp var hor brô rên un Tempest cunnar,
Hac a laqa fremi ar môr hac an douar.....
Petra eo an drous-se a vranl ar forestou,
A straci er meneziou, a scrich en draouniennou ?
Perac an drous hir-se, ar yuderis hep fin
Deus an elemantchou, diouz an nôs d'ar mintin ?
An horribl avel bis, strinjet dreist hor pennou,
Dindan un eë téval a lanç e dempestou.
Yudal, trei ha gourdrous a ra gant trous spontus,
Hac e venaq dreist-oll Breiz-Izel maleurus !
Goaguennou ar môr don a sav vel meneziou,
Hac en o flonch qerqent e fonc an abimou ;
Ar gouez, er c'hoajeyer, frailliet ha disrammet,
Hac ar ravach dre oll a ra en em velet ;
Ar grizill, ur môr giao a gües vel un diluch,

* Hac a laq endro deomp qement so en distruch.
* Ar voasiouigou so en goasiou bras chenchet,
* Hac an oll rivierou tro vardro debordet ;
* Lodennou meneziou so en em distaguet,
* Pontchou so distruijet, ha ties discaret :
* O restajou a heuill fulor an doureys ;
* Anfin, nemet horrol dre oll mui na veler.
* An dour hac an avel, en ur seurt tintamar,
* A ra crena betec e calon an douar.
* Var ar môr al lestri, tolet ha distolet,
* A string var ar riblou corfou martolodet.
* Ar bed so menacet da zistrei d'ar c'haos,
* Hac e seblant mesqa hac an deiz hac an nôs.
* Peur e velimp ar c'halm en hor brô baour o ren,
* Hac ar boneur etouez an oll bobl christenien !
* O Tempest spouronus ! arrêtit ho furror....
* O va brô ! ô natur ! ô theatr a horror !....
* O Doue ! chadennit an tourmantchou dirol,
* Ha roit, ni ho ped, ar c'halm bremâ deomp oll.

P E D E N

D'hou Autrou JESUS-CHRIST, evit obten demeus e risericord divin ma laqayo fin d'an Tempest horribl pehini a laqa an desolation da rên en hor brô baour.

O va Zalver adorabl ha meurbet carantezus! prosternet humblamant ouz ho treid sacr, ha leun a goniñan en ho madelez infinit, e credan dont d'ho suppbia da laqat un termen d'an Tempest horribl pehini a rên abaoue qeit all amzer, hac a zoug ar ravach hac an distruch ebars en hoa toues.

Pa en em dichaden an aveliou cunnaret varnomp, en eur yudal quer spontus; pa deu al luc'hed d'hor spouroni; pa grën an douar ha pa zeu d'en em digueri gant an nerz demeus an tourmantchou, betec ar fonc eus e abimou, na ellian caout nep recours nemet ennoch, va Doue, hac e lavarù diouzon va-unan : O va Doue ! chouai a so mad; na erruo netra nemet ar pez ho pezo ordrenet.

Oll œuvrou ho taouarn, ô va Doue ! oll e tennont d'ar vad assambles; oll e zeo buex au natur; ne zeus na maro, na destruction absolut. Na zeus nemet chenchediguez ha passach da ur vuez nevez.

Ordren a rit-hu d'ar gurun, d'an tempest, dont d'am distruija? cetu me amâ; prest oun, va Zalver, mar deo ho polontez; depouillit ac'hant demeus ar c'horf marvel-mâ; mes, petra a ellont-i a enep va ene immortel? Ma affranchisso ac'hant demeus a liamou ar c'high, ha va speret a yélo ennoch da gavet e liberte. Autrou J.-C., hoc'h adori a ran e creiz an Tempest horribl pehini a rên, e creiz ar storloq eüzes eus an oll elemantchou dichadennet, eus an drous bouzarus eus an doureys a gouez demeus an eë a livadou vras.

Doue a garantez ! mar teu ar grizill, an tourmant, da ravagi parqeyer va amezeg; mar teu ar fouldr da laqat an tan en e di, va freservit da soñjal en deveus meritet an disfortun-se. Ra bellayo ur sonjeson quer fall diouzon. Inspirit din qentoc'h compassion en andret va breur maleurus. Ordrenet hoc'h eus oll gant madelez, ô va Jesus ! hac ho polontxiou a so urzou a garantez. Nebeutoc'h e zeo ur c'hastiz oc'h eus scot var va amezeg, eguet un accident destinet da eprouvi va c'harantez.

Felvezout a ra deoch, ô va Zalver adorabl Jesus-Christ ! e recefen ebars va zi an hini en devecus collet e hini, e partachen frouez va douarou gant an hini en deveus dioueret e re, pe dre an Tempest, pe dreur maleur all benac. Se eo ho polontez santel; oll e tenn d'an union divin, d'au union eus a garantez Doue gant ar bed antier. O Jesus-Christ ! hoc'h adori a rin bepreat e creiz an Tempest, rac beza e zoch en oll an Doue a garantez.

Deurvezit ive teuler ur zell a drugarez var ar vartolodet paour, perè, epad rên an tourmant horrupl-mâ, a so exposet da vil danger. Anfin, Autrou Jesus-Christ, plijet d'ho madelez infinit laqat ar c'halm da succedi d'an Tempest spouronus pehini a zoug an horrol hac an distruch ea hon toues. Evelse bezet, grët.